

KIS-611 – Gl. son ha deveradoù

(YBAN & GE – 05-07 12 98)

[Dalc'hioù labour dre bellgomz]

Tro en doa bet GE da bleidiñ gant termeneg ar son en e eskemmoù gant PH e 1985 (sl. KIS-324, La-08, pp. 274-286).

PH a lakaas war wel e vez arveret Br. *son* e domani ar Sonerezh dres evel Sz. *tone*, Al. *Klang* (p. 282), o pouezañ war ar ret “klask ur ger all evit kendeç'heriañ Sz. *sound*, Al. *Schall*” (p. 283), eleze evit aroueziñ an anadenn alvezel. E se, gant ali GP, e voe kinniget Br. *sten* b. evit dec'heriañ ar c'heal-mañ diwezhañ (p. 286, sl. ivez KIS-402, La-09, pp. 398- 402).

En notenn-se ivez, p. 285, GE a ezrevelle ur roll deveradoù diwar Gl. *son*, o vould'hañ ur rummadur anezho hervez ma raent anv eus kreñvder, talm, tizh, klevadusted ar sten hep klask koulskoude divrazañ un hanc'herieg.

YBAN a ginnig diforc'hiñ an termenou o tenotañ doareoù enien ar sten, eleze alvezel rik, diouzh an termenou o tenotañ doareoù ezien, klevadusted ar sten en degouezh.

TERMENOU O TENOTAÑ DOAREOU ENIEN AR STEN

A-gostez e lezomp keal *kreñvder ar sten*, bet studiet c'hoazh e KIS-324, id., p. 277¹. Anv zo graet hepken eus an *talm* hag an *tizh* (pe *herr*, sl. KIS-402, p. 399) anezhi.

TALM AR STEN

¹ E KIS-324 e oa anv eus *kreñvder fizikel ur son* (a anver hiziv *kreñvder ar sten*) pe *tregern* b., a zo ur gallouter gorreel, MT³, kevenebet ouzh *kreñvder bevedel ur son* pe *klevrez* g.

E-keñver *talm* e reer anv eus Gl. *hypersons* eus ar stenwag (pe gwagennoù sten) gavaelet o zalm etre 10^9 ha 10^{13} Hz, anadenn studiet er C'horrfizik, er Strinkennoniezh, en Optik... Dedalvezet int d'an Elektronik ha d'ar Stlenneg. Evel ma'z eus anezho uheldalmoù, e kinnigomp reiñ dezho an anvad Br. *uhelsten b.-ioù*.

TIZH AR STEN pe STENHERR

“Emañ ar stenherr e dalc'h ar metou : en aer ez eo 340 m/s, en dour 1 500 m/s. An div werzhad-se zo stenherroù er gwrezverk ordinal, rak a-gevreizh emañ ar stenherr d'ar gwrezverk” (KIS-402, id., p. 399). Anv a reer eus ar ventad-mañ dreist-holl en nijerezh pa zewerzher tizh ul loc'hell en aergelc'h evel brasoc'h pe vihanoc'h eget tizh ar sten hag ez arverer ar Mach [max], keñver tizh al loc'hell ouzh ar stenherr. Tizh al loc'hell (hag al loc'hell he unan) a adanver *trastenel* (Gl. *supersonique*) pa vez brasoc'h eget ar stenherr, *danstenel* (Gl. *subsonique*) pa vez bihanoc'h, *trostenel* (Gl. *transsonique*) p'emañ er gavael etre 0,8 hag 1,2 Mach. An tizhoù par da pe vrasoc'h eget Mach 5 a adanver *gourstenel* (Gl. *hypersoniques*).

TERMENOU O TENOTAÑ DOAREOU EZIEN AR STEN

Anv ez eus amañ eus *klevadusted* ar sten a-geñver gant an *talm* anezhi. Gavaelet emañ ar glevadusted vonan keitat etre 20 hag 20 000 Hz. Komz a reer enta eus *talm gwehin ar glevadusted* (20 Hz) hag eus *talm gourin ar glevadusted* (20 000 Hz) hag e reer *isstenioù* (Gl. *infrasons*) eus ar stenioù dindan 20 Hz, *usstenioù* (Gl. *ultrasons*) eus ar stenioù dreist 20 000 Hz. Ar stenioù klevadus (etre 20 hag 20 000 Hz) a c'hallfed envel *ensonioù*.